

# bremañ

ETATS GENERAUX DU P



POBL BREIZH  
UR BOBL EN EUR



UX DU PEUPLE BRETO



BREUJOÙ BREIZH  
Un darvoud a-bouez





Breujoù Breizh e Roazhon

## Kas Breizh war-raok

Ouzhpenn 400 den o doa kemeret perzh e "Breujoù Breizh" dalc'het e Roazhon d'an 12 a viz Genver diwar intrudu al listennoù unvan evit an dilennadegoù rannvro : "Pobl Breizh, ur bobl en Europa".



Pennoù listenn ar pemp departamant kinniget gant Loeiz ar Beg, A-gleiz da zehou : Jean Duchet (35), Michel François (44), Loeiz ar Beg (35), Henni Gourmelon (22), Nalg ar Gars (29) ha Joel Gwegan (56).

Stad an traoù hiziv an deiz e Breizh. Sed aze danvez an divizoù lañset gant ar 7 prezegenn pedet gant listennoù unvan an Emsav evit dilennadegoù rannvro an 22 a viz Meurzh. Al labour-douar, ar peskerezh, an ekonomiezh hag ar c'hultur a oa war ar roll. Evit gwir n'eo ket prezegennoù arabadus a oa bet klevet. Ar re a gomzas a anavez mat-tre o zachenn. Kentelius-tre e voe d'an holl.

### Ekologiezh hag ekonomiezh liammet

André Pochon, labourer-douar, a ziskouezas penaos en deus graet evit liammañ an ekonomiezh gant an ekologiezh. Lakaat a ra eñ anat ez eus tu d'an ober en ul levr nevez embannet (\*). Kadarnaat e voe e gomzoù gant Jean-Claude Pierre, eus ar govredigezh "Doureier ha stêroù Breizh" ha Corentin Canevet, kelennar skol veur. Yves Laine, rener an diorrenn e BAI ha Denez L'Hostis, e-karg eus aozañ ar peskerezh e kornôg Breizh a genalc'has da vroudañ an divizoù frouezhus.

### Fest noz

#### Pobl Breizh, ur bobl en Europa

Ur fest-noz a vo aozet gant strolladoù skoaell Bro Leon d'ar **Sadorn 15 a viz C'hwevrer** e Landerne, sal ar Family Kaset e vo en-dro gant : Ar Bleizi Ruz, Kanerien Langazel, ha kalz a sonerien eus ar vro.

### Gouel Bras

Ur gouel bras a vo aozet evit skoaellañ al listennoù "Pobl Breizh, ur Bobl en Europa" d'ar **Sul 15 a viz Meurzh** adalek 2 eur 30 e Brest sal Penfeld. Kalz a sonerien hag a ganerien a gemero perzh er gouel hag en o zouez Alan Stivell, Gilles Servat ...

### N'eus ket a Vreizh hep he c'hultur

Pal an devezh, evit an aozerien, a oa diskouez petra eo Breizh ha petra ez eus tu d'ober evit kas anezhi war-raok. Ma'z eo liammet an ekonomiezh gant an ekologiezh eo liammet ivez gant ar c'hultur. Ret eo reiñ nerzh en-dro d'ar Vretoned dre o yezh hag o fersonelezh dezho o-unan ; seul grefivoch e vint evit talañ ouz an amzad da zont. Setu ar pezh a ziskouezas Goul'han Kervella eus Strollad c'hoariva "Ar Vro Bagan" ha dreist-holl Per Denez a lakaas anat penaos e kendalc'h stad C'hall da vogañ ar brezhoneg.

Ekonomiezh, ekologiezh, kultur ; kas Breizh war-raok war an teir zachenn-se en ur liammañ anezho. Sad ar pezh a faot da UDB, POBL, Frankiz Breizh, Emgann hag an holl re bodet war al listennoù "Pobl Breizh, ur Bobl en Europa". En diskouezet o doa splann an devezh-se.

Gwenael Caradec

(\* "Du champ à la source" gant André Pochon

Bombezennoù e Roazhon

## Sinet FLNC-istorel

Lakaet e oa bet 2 vombezenn da darzhañ e Roazhon d'ar Sul 19 a viz Genver. An deskadurezh-stad eo a oa taget.



### A-gevret evit Breizh vev

#### DIORROADUR TREVONIEZH KENSKOAZELL

An 22 a viz Meurzh a zeu a vo un deiz a bouez evit ar Vretoned hag a zilenno o c'hoñsailherien rannvro.

E-touez al listennoù niverus a c'houlenn diganeoc'h mouezhiañ evit, n'eus nemet al listennoù anvet «Pobl Breizh, ur Bobl en Europa» a vo war ar renk er pemp departamant.

N'eus nemeto hag o deus da bal reiñ da Vreizh ur galloud politikel barrek da respont d'an ezhommoù armerzhel, trevoniel ha sevenadurel a vo he re en amzer da zont.

N'o deus ken mennad nemet servijout lazoù Pobl Breizh, war-eeun, en ensavadurioù europeat.

Evit gounit ar glaouste istorel-se hon eus ezhomm eus ho skoaell. N'eus en hor c'herz nag an araeziou propaganda nag arc'hant bras ar strolladoù bras gall. Hag a-hend-all ne fell ket dimp mont gant an hentoù treuz o deus bete re louzet ar politikerezh, pa sellomp-mi outi gant bri.

Ho roadenn, pegen bihan bennak ha ma ve, a vo anezhi unan eus ar vein a yelo d'ober an ti a fell dimp kensevel evit hon dazont.

Lezenn ar 15 a viz Genver 1990 a ro tu d'an hiniennoù ha d'an embregerezhioù da reiñ arc'hant da getver ar mouezhiadegoù. An dad a zo war ar renk ne c'hellont dastum arc'hant nemet dre hanterveurizh ur c'hefidiad arc'hant.

Ar gevredigezh **POBL BREIZH, UR BOBL EN EUROPA** zo bet savet evit se ha disklriet eo bet en isprefeti Brest ar 17 a viz Kerzu 1991. An arc'hant roet dre chekennoù a ro tu da gaout un distaol war an tailhoù.

*Menegit a ra mellad 238 ba Lezennoùeg Hollek an Tailhoù :*

- e tes ar profoù da zigreskiñ gounid tailhadus an embregerezhioù, gant ma c'hoarvo dindan 2 dre vil eus sammad ar gwerzhioù MT.

- o deus an hiniennoù ar gwir da gaout un distaol war o tailhoù a 40% eus ar profoù, met ne dalv ket an distaol-se en tu all da 1,25% eus ar c'horvo dindan dalv.

*Kensollat e vez ar profoù d'an dad war ar renk gant ar profoù all a ro gwir da gaout distaol tailhoù.*

Menegit war ho chekenn : "Pobl Breizh, ur bobl en Europa".

N'eo ket ar wazh kentañ ma vez taget Nar rektori e Roazhon. E 1976 ha 1988 e oa bet graet gant ARB. Ar wazh-mañ n'eo ket Bretoned o deus graet an taol met Korsed, re FLNC-kanol istorel. Dindan pemp munut e tarzhas an div vombezenn : unan e Ti an Amodennoù, boulouard an Dukez Anna, eben e kreizenn rannvro an titour pedagogel, straed Antrain. Distrujoù bras en daou lec'h. E Bastia e voe anavezet an taolioù gant FLNC-kanol istorel. Krog eo an aozadur kuzh da stourm a-enep da bolitikezh stad C'hall a-zivout o yezh, ar C'horseg. E miz Gwengolo o doa taget rektorioù Versailhez ha Créteil.

Ar gevredigezh **POBL BREIZH, UR BOBL EN EUROPA** zo bet savet evit se ha disklriet eo bet en isprefeti Brest ar 17 a viz Kerzu 1991. An arc'hant roet dre chekennoù a ro tu da gaout un distaol war an tailhoù.

Gw.C.

### Dilennadegoù

#### BRUDEREZH

D'an 29 a viz C'hwevrer e vo dalc'het en Oaled, Tragonou, ur pred krampouezh hag horbalanod. Evit soutenn listenn unvan Breizh er Mouezhiadegoù Rannvro an hini e vo. Deuit niverus ta ! Priz ar Pred : 50 lur ar re vras.

20 lur ar re vugale 5-12 vl.

Da heul ar pred e vo ur fest-noz evit netra evit ar re a gemer perzh er pred (20 lur evit ar re all). Evit gouzout hiroc'h hag evit mireout ho plasoù.

Skrivit pe pellgomzit da :

**Pred Soutenn**  
46, straed Branda 29200 Brest.  
(98.46.22.73)

**KOUMANANTIT BUAN :**

**180 LUR/BLOAZ**

**ESTREN-STAD 230 LUR**

**12 NIVERENN**

**KOUMANANT-SKOAZELL**

**ADALEK 200 LUR**

**8, STRAED HOCHÉ,**

**35000 ROAZHON**



Stourm ar Brezhoneg hag ar skinwel

Abaoe ouzhpenn bloaz bremañ emañ Stourm ar Brezhoneg o kas ar stourm war-raok evit gouini ur ganol skinwel e brezhoneg.

Riet eo deomp resisaat amañ ar pezh a fell deomp lavarout pa reomp anv eus ur ganol skinwel e brezhoneg :

- Stallet e vo ar ganol e Breizh ha renet gant Bretoned.
- Yezh skignañ ha yezh labour ar ganol e vo ar brezhoneg.
- War-Vreizh a-bezh e skigno ar skinwel e brezhoneg, Breizh Uhel koulz ha Breizh Izel, Bro an Naoned koulz ha peurrest ar vro.
- Da ezhommoù an holl vrezhonegerion e vasto ar ganol e brezhoneg, ha dreist-holl da ezhommoù ar vugale.
- Diazezet e vo ar skinwel e brezhoneg war ar c'hrouñ e Breizh hag e brezhoneg, ur gwir gellusker ma vo evit sevenadur hor bro.
- Digor e vo ar skinwel war ar bed ha troet war an dazont, er-maez eus lagenn ar broviñselezh, hag eus kar'har ar brizhkultur gall hag amerikan.

Kement raktres na vo ket ennañ ar c'hwec'h elfenn-mañ ne c'hell ket bezañ sellet ur raktres da Sevel ur Gwir Ganol Skinwel e Brezhoneg e Breizh.

Bugale Diwan Naoned e "Breizh da vare an Duged"

Kalon Anna

22 vugel eus Skol Diwan en Naoned a oa bet d'ar Merc'her 15 a viz Genver da welet an diskouezadeg "Breizh da vare an Duged", e mirdi Dobree. Gant an Aotrou Armand Tosser e oant ambrouget er veaj-se en amzer.

"Brav e oa an diskouezadeg, eme ar vugale, dreist-holl ar c'h-releg kalon ANNA, en acour holl !" A-c'houde ar wladenn-se e vo fardet ul levrig skeudennet, "Breizh da vare an duged" e dabenn, evel-just.

Patagonia

N'eo ket bet disoñjet gant kembreiz Patagonia ar pennad diwar o fenn bet skrivet ganin war lerc'h ma zrolad en o bro (Bremañ nv. 100). Kaset o deus din ur skouerenn eus luc'hskeudenn Niverenn gantañ ar gelaouenn "Y Dravod" bet graet a-benn lidañ Kantvet deiz-ha-bloaz he c'hrouidigezh.

P.A.M.

Divyezhegezh

Panelloù Brezhonek er Skol Veur

Kuzul melestradurel Skol-Veur Roazhon 2 (kêryann) en doa asantet d'ar 17 a viz Genver 92 kinnig kannad Dazont-USB (Unvaniezh Studierien Breizh). Dindan miz e vo lakaet panelloù gallek/brezhonek e lec'hioù a-bouez ar skol veur.



Studierien DAZONT o vanifestiñ e kreiz-kêr Roazhon

Abaoe pell e veze goulennet lakaat panelloù brezhonek e Skol-Veur Roazhon 2. Deuet eo an taol da wir ar wezh-mañ. Ar mennad, broudet gant ar sindikad studierien Dazont ha kensinet gant un den eus pep sindikad studierien hag eus pep rann : ATOS (impiljidi nann kelennerien), kelennerien ha tud diavaez zo bet votet ha degemeret gant ar c'huzul melestradurel. Dindan miz e vo lakaet eta panelloù divyezhek : gallek/brezhonek e lec'hioù pennañ ar skol veur. Er maez, war ar straed, e vo gweliet "Skol-Veur Roazhon 2 - 6, bali Gaston Berger". E-barzh e vo

"degemer, kelaouerezh, porzhierrez, skollataerezh" e-kichen an anvioù kevatal gallek.

Goulennet ez eus bet ouzhpenn lakaat war follennoù-lizher ofisiel ar skol-veur: "Skol-Veur Roazhon 2 Breizh-Uhel" e-tal ar gallek. Graet e vo evit kevrennoù zo.

"Ur skouer eo evit ar skolioù meur all e Breizh hag e broioù all : Euskadi, Korsika, Katalonia..." eme Riwall ar Menn, Dileurid Dazont er c'huzul melestradurel a-gewret gant Gilbert Cabon. "Ur skouer eo ivez evit an holl skolioù e Breizh".

Gw.C.

Skol-Veur Roazhon II

Devezh-studi d'an 8 a viz C'hwevrer

D'ar Sadorn 8 e vo dalc'het un devezh-studi (sal D.421). Gouestlet e vo an devezh-labour-mañ d'ar c'hoariva. Adalek 9e30 gant Gwenael an Dug "Ar bed war al leuc'hoari ag ar Grennamzer betek Job er Bayon". Da houl, da 10e30 gant Paolig Combot "Jan Conan, skrivagner pezhioù-c'hoari"

heuliet gant un diviz adalek 11e30. Goude kreisteiz vo kinniget deoc'h gant Yann Ber Pirou, adalek 2 eur "Strollad Beilhadegoù Treger". Komzet vo ivez diwar-benn "Strollad ar Vro Bagan" gant Goulc'han Kervella. Hag evit klozañ an devezh-studi vo graet un diviz adalek 3e30.

Digoradur ofisiel skolaj Diwan Roparz Hemon e Brest Ouzhpenn 100 skoliad a-benn bloaz !

Taol-Pluenn

Ar F.N., ur skwer evit an Emsav



Maor ar Releg (a-zehou) o hetin e vefe digoret al lise hepdale

D'ar Gwener 10 a viz Genver e oa bet lidet digoradur ofisiel skolaj kentañ Diwan er Releg Kerhuon, gant pennoù ofisiel Breizh bet pedet evit an degouezh : a-gleiz da zehou, Lukian Kergoat, rener Kevrenn Galtiek Skol-Veur Roazhon II, Charles Miossec, Prezidiat Kuzul Penn ar Bed, Jean-Yves Cozan, Is-Prezidiat ar C'Huzul, Andre Lavanant, Prezidiat Diwan ha

Julien Kere, Maor ar Releg. Pennoù politikel hag armerzhel e-leizh a oa deuet da anvistiñ ouzh troc'hadur ar seizenn wenn-ha-du gant J.Y. Cozan, o tegeriñ ez-ofisiel e-giz-se ar skolaj nemetañ a ra gant ar brezhoneg eus ar c'hwec'hvet d'an trede klas. Ur c'hortozpenn ouzhpenn aet gant Diwan. Gortozpenn digoradur ofisiel al lise bremañ neuze !

Embann filmoù video e brezhoneg

Abaoe tro 1980 ez eus bet graet un nebeudig brav a filmoù bev e brezhoneg gant FR3. Sur awalc'h eo bet merzet gant meur a zan ez eus anno danvez a c'hell bezañ dedennus d'an neb a zo o teskiñ pe o peurluskiñ brezhoneg.

Sotñ zo kinnig d'ar CRDP (Centre Régional de Documentation Pédagogique), e Roazhon, embann, ha lakaet evel-se etre daouarn an holl gelennerien a gao, kasetoù video warno ouzhpenn ur film eus ar re-se. Evel ma vez graet evit yezhoù all en deskadurezh, embannet e vefe asambles gant ar filmoù, peb a levrig, skrivet anno pep gao.

Kuitrez, hag ar den hapken c'hoazh diouz ar pezh a anavez, hag ar pezh a bij dezhañ, e ran ur goullenn d'an neb a gavo respont : peseurt filmoù ("dramatiques") gant FR3 a gav deoc'h a dalvez ar bean bezañ dalc'het hag embannet er stumm a zo anv anezhañ ?

Ret eo detc'hel kort eus daou dra dreist-holl, d'am

sonj. Da gentañ-holl hag interest an istor e-unan, dreist-holl o soñjal e krennarded a zeak brezhoneg e skolioù oñ dez. An eil eo rei soñjal eo sallet ar mod brezhoneg a vo klevet evel-se bezañ ur "skwer", hini mat eta. Arabat d'ar raktres-mañ bale war un troad hapken.

Degaset din ho evezadennoù, dre lizher kentoc'h. Ezhomm 'zo anv ar film, evel just met ivez, ma c'hell gouzout, anv ar realizatour, ar bloavezh m'eo bet graet ar film, ha, diaseoc'h da gao, da bezañ deoc'h eo bet gwelet evit ar wech kentañ an daou anv kentañ eo a gont ar muiañ-ave, awalc'h e vo e gwirionez.

Merkañ a c'helloc'h ivez, evel just, dra reñ ur urzh dezho pe neuze pep a "notenn" pare, e touez ar filmoù kinniget ganeoc'h evel-se, a gav ar re pouezhusañ. Gedal a rei ar respontoù betek m'arzoù Paok 1992 evit ober va c'hinnigoù evit ur c'hased kentañ. Met ouzhpenn unan a c'hell bezañ, izizais m' eus.

Mikael Madeg Kerol 29600 St Tounan - pg. 98-20-32-20

Ya 'vat, lennet mat hoc'h eus : ur FN, ur skwer evit an Emsav ! Ha penaos 'ta ?

Ret eo lavarout ez eo ar (AF)FRONT NATIONAL ur strollad kreñ-tre, ha n'eo na dre e c'halloud politikel na dre n'eo e izili ez eo. Krenv eo rak pep ezel eus an F.N. a zo ur stourmer prest da sikour ar strollad ha da gas e vrud war-raok n'eus forzh pegoult ha n'eus forzh pegement. Hag ar re yaouank da gentañ-penn ne lavaran ket !

Ha setu gwander an Emsav hiziv an deiz : pelec'h emañ an emsaverien prest da vont da vanifestiñ dre viladoù ? (ha n'eo ket dre gantadoù evel boaz ; den ne ra foutez kor eus ur pevar c'hant istrogiñ bannak o tibunañ, bezomp onest !). Pelec'h emañ an dud prest da c'holoñ mogerioù hor c'harioù gant skritelloù evel ma ra tud an F.N.

Poent e vefe dimp kregiñ e-barzh da vat ma fell dimp gouini mouezhioù a-walc'h en diennadegoù Rannvro a zeu. Ha pelec'h emañ re yaouank an Emsav dreist-holl ? Izel-tre eo niver an emsaverien yaouank (dindan 20 vloaz lakaomp) a gomer perzh er manifestadegoù. Marteze e rafe vad d'an Emsav adsoñjal e framm evit ma vefe un tamm mat digoroec'h ha degemerusoc'h d'an dud eus an diavaez. An Emsav a rank mont da gejañ gant ar warin ha n'eo bet ar c'hontrol ez eo avat, anat deoc'h.

Deuet eo an Emsav da vevañ ur seurt klub prevez ma kaver ennañ stourmerien a-viskoazh a fell dezhe bezañ perc'hennerien an Emsav mui-pe-vui.

Ar c'hontrol ez eo gant an F.N., hag abalamour da se ez a war gresk niver ar re yaouank a zo prest da greskiñ roll e izili.

Hag un draig all evit ac'huiñ. Mat e vefe kaout ul logo sklaer ha splann evit kempagn listenn unvan Breizh - betek hen ez eo bet diazezet goñt gant piv eo bet savet ar skritelloù (Bloavezh mat, ha...) nag evit petra-

War se e klozin ma c'homzoù. Nemet e larfan deoc'h n'eo ket niver an izili a ro nerzh d'ur strollad pe d'un Emsav n'eus forzh pehini e vefe, met startijenn e izili an hini eo.

"Dinec'h ha krann bretoned, vo tenn ar stourmer ..."


Ronan Barvek

# A-unvan hep ober van

*Gant aked bras an hini 'm eus lennet pennad Tangi Louarn e-barzh niverenn "Bremañ" miz Du koulz hag hini Joel Donnat -o daou e barzh rann ekonomikel ar gelaouenn.*  
*Sed aze pennadoù eta o tennañ da gudennoù an diorroñdigezh en hor bro ha brav eo embann seurt skridoù enno sifrou a zoare evit kompren stad an dilabour e Breizh pe taolioù fall an adkritezañ.*

skis a-walc'h koulskoude e kavan ar mod m'eo bet diellennet ar gudenn gant T.L. Pa welet nivar an dud ganto ul labour a tigreknig ingal abaoe 1982 hag hini ar re dilabour o kreskiñ buan abaoe 1968, penaos eta e c'hortozet 1991 evit diskleriañ evel ma ra T.L. "eo krog Penn-ar-Bed da goll implijoù". Daoust hag-efñ e vefe an dud bodet e Kastellin d'ar 24/11/91 o tizoleiñ a daol-trumm, penaos-mañ kont gant an dilabour e Kornog Breizh? Lod 'vez atav pell 'klask dont, war a hañval! Marteze e oant bet pell ivez o pediñ Intron Varia rekourans a-raok dizallañ benn ar fin!

Drol e-walc'h memestra ne vefe tamm kaoz ebet gantañ diwar benn krommenn ar boblañs oberiant gopret o tiskallañ diouzh hini ar boblañs oberiant nann gopret abaoe 1968; splann eo d'am soñj ez eus muioc'h-mui a c'hopridi bremañ e Penn-ar-Bed e-keñver ar boblañs oberiant hollek ha nebeutoc'h a golverianted pe a gouerien da skouer.



...Un dra c'hoazh a vije ret sklerijennañ un disterañ ..."

Degasomp da soñj e oa bet graet un diskrog-labour gant ar sindikadoù all ha just a-walc'h diwar-benn kudennoù all labour, ar goprou hag an asurañsoù sokial! Ha dres d'an ampoent hag e-keit m'edo ar CFDT hag ar CGC oc'h ober "un diskleriadur boutin(?) gant ar batroned e Kastellin! Penaos e c'hell neuze seurt "nerzhioù ekonomikel" goulnenn un emgav digant ar c'hentañ ministr anez bezañ klasket lakaat ar galloud da blegañ tamm pe damm? Pe daoust hag efñ ne vije ket bet graet aratozh-kaer evit tennañ gounid eus diskrog-labour ar re all!?

Met gwir eo ez eus tud e giz-se oc'h azeuliñ ar galloud peogwir ez eo ar galloud ha tra ken! Ha n'eus forzh peseurt liv e vefe! I Ken gwir all ez eo reizh dre natur d'o soñj, diazezet m'eo war ur bennaen veur o ran ar bed, kea? Lenn ar ran barzh pennad T.L. o

defe c'hoant an "nerzhioù ekonomikel" unanet "derc'hel ar servijou publik a zo ezhomm anezho war ar maez".

Joël donnat en ur pennad all a ro deomp da c'houzout ez eo bet savet komite Ekonomikel ha Sokial Breizh a-enep adframmañ servijou ar Post abalamour ma 'z eus "kalz a riskou da welet un toullad mat a vurevioù-post bihan war ar maez o sernñ a-raok pell".

Ha pelloc'h e skriv c'hoazh Joel Donnat: "nebeutoc'h a du a vije ivez siwazh d'ar Vretoned diroet e Pariz, da retorn d'o bro da labourat, da vretonez yaouank da vevañ gopret e Post Breizh". Baz e lavarín ouzhpenn ne oar den ebet c'hoazh petra tevio da vevañ ar re zo o labourat e Renerezh Rannvro ar post e Breizh!

Me garfe kompren penaos e c'hell embann ar CFDT e fell dezhi derc'hel ar post war ar maez d'ar 24 a viz Here

e Kastellin pa 'z eo bet savet a-du gant adframmañ servijou ar Post e-kerz Kuzul-merañ ar Post d'an 23 a viz Gouere 1991? Pilpousezhez? Barboallerezh?

Start e vo ivez d'ar Vretoned yaouank na vezont ket gopret e Post Vreizh koulz hag ar re a vo dav dezho gortoz e Pariz da retorn d'o bro, kanañ war an ton bras gant ar CFDT: "Bevañ ha labourat er vro", neketa? Setu a-benn ar fin diskuliet splann d'an holl ur wech c'hoazh, mar befe ret, al liammoù a sujedigezh a zo atre ar CFDT hag ar galloud ha pa vefe politikel, ekonomikel pe avel just speredel.

Sklær e tevio an traoù da vevañ e giz lagad un naerenn gant digas da soñj a rafemp un nebeud darvoudoù nevez c'hoarvezat!

Gout a ra kement hini a sell pizh ouzh ar vuhañ kevredigezhel hag a seloau tamm pe damm ar c'helaier, ne vez ket roet mel gant al loa-bod d'ar gouarnamant, na da Fañch Mitt, na da Edith Beler e-barzh meur a sondadeg.

N'eo ket dav mont da glask pamp troad d'ar maout, kemend-all a droioù kamm 'vez c'hoariet d'ar paour kaezh sujidi ac'hanomp! Sonjñ ta penaos 'mañ an ton gant an dud digouviat e pep lec'h dre ar vro (Citroën, Thomson da skouer!). Ha setu ar CFDT o reiñ brud d'hech ugent kinnig graet "karta evit al labour" anezho.

Petra a ginnig ar "Sindikad"-se neuze:

- o ma vefe skoaizellet ar stalioù labour bihan ha krenn
- o ma vefe divec'hiet diouzh ar c'hargoù sokial ar goprou izal hag ar stalioù o c'hoprañ kalz a dud
- o ma vefe krouet postoù-labour "a-dost"
- o ma vefe galvet an holl d'an armoù:
  - ar sindikadelourien
  - ar dud e karg eus embregerezhioù
  - ar Stad
  - an dud diennet
  - ar Savadurioù dre hanter
  - an tiaz-k'ar, ar c'huzulioù-meur pe rannvro
  - an aozadurioù.

Ali eo ar CFDT eta e vez klask da c'hopridi-marc'had-mat gant an embregerezhioù. Un drouziwezh setu vez sellat ganti ouzh an dilabour anezhañ un tonkadur fall. Setu e rank an holl en em unaniñ ha pa vefe dav d'ar c'hopridi sachañ war ibil barr hag ober pinijenn! Dasorc'hat an Unvaniezh Sakr, pedavare ar Marichal kozh a oa ouzh he ren?

D'ar 16 a viz Gwengolo e-doug ur brezegenn dirak kargidi stalioù labour bihan ha krenn e embann Edith Beler he raktes: ur skoaizell 12 miliard a lurioù, d'ar 25 a viz Gwengolo, dirak kannaded ar PS e vez spishaet an

traoù ganti: garventaz war an dachenn ekonomikel, digresk war skodennoù sokial ar batroned, ma 'z eus kouviat tud yaouank ganto (etre 18 ha 25 bloaz), krouiñ postoù labour evit sikour ar famihioù hag an endro, reiñ lafs d'an emglev evit al labour en ur lakaat a-gevret ar Stad, ar batroned, ar sindikadourien, an embregerezhioù, ar c'huzulioù-meur pe rannvro, an aozadurioù ha traouigoù c'hoazh.

D'an 11 a viz Here an em gav ar CFDT, ar CFTC, CGC hag ar FEN e Matignon. 30 miliard a lurioù a vije kavet dre brevezañ stalioù perchennet gant ar Stad, a lavar ar vandenn dislavaret o c'homzoù gant Matignon ha Minister an Argant Bras!

7,5 Miliard a lurioù kemeret diwar an 30 all (dislavaret vel m'hon eus gwelet!) d.l.e. 6 da zivec'hiañ ar batroned diouzh o c'hargou sokial hag 1,5 miliard evit ar postoù-labour "a dost". Setu vije gopret e-kerzh daou vloavezh (1992-1993) ur c'hantmil bennak a dud yaouank gant ar S.M.C. Met pa n'eo ket

bet enkefiat c'hoazh arc'hant ar prevezañ gant ar Stad e vo dav d'an asurañsoù sokial astenn moneiz, d.l.e. ur wech c'hoazh e vo lakaet ar c'hopridi da rakpaeañ! Pedavare neuze vo kresket ar CSG lezennet gant ar CFDT?

Setu e peseurt framm e c'heller lakaat afar Kastellin. Hervez an arbannaigourien war an dachenn ekonomikel o vo gwashoc'h c'hoazh an digouviaded a-barzh pell. An havelep re a vezo ret dezho paeañ evel-just, met daoust hag-efñ e talc'hint da rentañ gras d'ar Stad ha d'he matezh sindikadel anez sevel o mouezh?

Evit echuiñ e kerfen goulnenn digant T.L. petra eo an talvoudusañ: sevel a-du gant ar re a glask reiñ un digarez d'ar galloud ha didammal, dezhañ a-raok ar voladegoù, pe ar Vretoned a zo deut a-benn d'an em unaniñ evit klask mestroniañ o flanedenn da geñver an dilennadegoù a zeu? Met daoust hag-efñ ne vije ket en aner klasket e anv en o zouez?

Per Vari Kerloc'h.

Per-Vari Kerloc'h, war zigarez daou bennad embannet e-barzh Bremañ (miz Du) a ra un diellennadur eus anezhañ sindikadoù 'zo. N'eo ket dizar-benn e arguzennoù a rin, rak ne oa ket pal va fennad difenn tazenn-mañ-tezenn, met reisaat poentoù zo:

- 1- Un vi koutkou a zo an em silet e-barzh tok va fennad diwar-benn diskleriadur Kastellin: n'eo ket "sindikadoù gopridi labourerien douar" a oa da vevañ skrivet (da lavarout eo gopridi hepken), met "sindikadoù gopridi, labourerien douar..." (da lavarout eo tud gopridi diouzh un tu e forzh perore micher ha labourerien douar diouzh un tu all). Met, e korf ar pennad e veze lavaret sklær piv a oa aze: Unvaniezh Etramicheal ar Batroned, Unvaniezhioù CFDT, CFTC hag F.D.S.E.A. gant ar c'hambroù ekonomikel.
- 2- N'eo ket ur pennad-stud ul labourer ekonomikel Penn-ar-Bed am eus savet. Renta-kort un darvoud n'eo kan. Div elfenn a oa an darvoud-se: un liasseur, ha sifrou embannet en un teulad ha roet da anout (dre vras) da lenneien v-Bremañ.
- 3- Souezhus eo e lavarfa P.V. Kerloc'h n'eus ket kaoz ar pennad eus "krommenn ar boblañs oberiant gopret o tiskallañ diouzh hini ar boblañs oberiant nann gopret abaoe 1968". Bete gouzout, ar grommenn am eus lakaet a zo dam eus ar pennad ha diskouez a ra arvant ar pezh a lavar hor c'henskriver (gant

emdroadurioù all evel an dilabour, ar boblañs gant ul labour hag all... Daoust ha n'eo ket dre lenn ar grommenn e deus gwelet an emdroadur-se. Un deusadenn a dav alies un displegadur. Berroc'h-a-se ar pennad, 'pezh zo unan eus ar perzihoù pouezañ.

4- Moarvat n'eo ket a daol trumm ez eo bet dizoleat stad an dilabour e kornog Breizh. Sifrou niverdigezh 1990, avat, a zo bet diskleriet nevez zo hag o deus lakaet a-wel stad al labour hag an ekonomiezh en un doare rasis hag hollek. Etre div niverdigezh n'eus ket atav ar binvioù rekis d'ober kevheriadennoù ken sklær. Live kresk poblañs an Ile-de-France e-keñver ar rannbarzhioù all a zo bet an darn-souezhadenn evit kalz tud. Raktresoù meur rannbarzh Pariz (Bremañ niv. 118-119) a zo bet un broad all.


5- Ne vin, me gav din, dislavaret gant istorour abet o vaneñj n'eo nemet a digarez d'un emglev etre holl nerzhioù ar vro ha deus gallet Breizh mont war zironn evel m'he deus graet da vare ar CELIB hag ar bloavezhioù war-lerc'h. Evit' pezh a sell ar sindikadoù, holl gwitbunan ez int savet war batrom ar stad c'hall kreizannet, ha, dre-se, sujat mui pe vui d'ar galloud kreiz, politikel, stadeg pe ekonomikel e par Bro-C'hall pa n'eo ket e par Europa pe ar Bed. A-wechoù avat (alies?) ez eus dislavaret etre kreiz an aozadurioù hag an elfennoù anezho e Breizh pe e lec'h all, evel m'hen diskouez stourmoù 'zo.

T.L.

Trebeurden, an disunvaniezh

“Trouz en ti bihan !”(\*)

N'a ket mat an traoù tamm ebet e Trebeurden. Damechu eo ar Porzh, met dre urzh al lez-vern velestradurel eo paoezet ur wech ouzhpenn al labourioù.



Ar porzh e kreiz miz Genver. Paoezet al labourioù ur wech ouzhpenn

Un tammig Istor

Kroget e voe gant al labourioù e 1990 met harzet e voent a-raok an hañv tremenet. Lakaet en o fenn gant tud ar C'huzul-Stad ne oa ket dleat d'ur savadur ken bras hag ur porzh-mor...

ober. Da c'hortoz ken na vefe peurlvaret an afer e roas urzh d'ober un arsav war guzuliadenn an ti-kêr. Eveljust e voe ret diwar neuze paoez adarre gant al labourioù.

“Brise-Beton” er vro

Kement a drouz a savas diwar-benn-se er gouarnamant ma rankas Brice Lalonde (Torr-Belois), ministr an Endro, bountañ muloch e fri barzh ar jou. Setu ma teuas betek Tregor da welet ha da glevet Petra a oa kiriek d'ar safar. Gwir eo e oa e Strollad “Génération Ecologie” a-enep d'ar porzh-emit-ar-blijadur. Diskleriañ a reas en devoa c'hoant d'ober ur skouer eus porzh Trebeurden. Evit ar wech kentañ er Frañs, e c'hellfed gwelout dispenn ur savadur ken bras hag adlakaat an aod evel ma oa daou vloaz zo.

Ar menoz-se a lakaas P.S.F.22 da sevel en o gweznenn uhelañ hag e stagas ar strollad da stourm evit ar porzh, “uhel kentañ” e Pariz. Klask a reas neuze Kuzul-kêr Trebeurden kaout ur stumm bennak da genderc'hel en desped d'ar bac'h nevez-mañ. Lavarout a rejont e oa

graet ar poull nevez ha penaos ne ginniget ober nemet un nebeud labourioù war e dro. Rak, kompren a rit, ne vane mui nemet 6 sizhunvezhiad labour ken d'ober hag e vije bet echuet ar Porzh.

D'an 13 a viz Kerzu ez eas ar prefed e fulor bras kement ken ma c'houc'hemennas chom a-sav diouzhtu gant al labourioù. Ken nebeut a labour a chome da ober, met ret e voe memestra houbañ hag e kuitas an dousterien ar santier.

Penn-da-benn ar bloaz e voe manifestadegoù gant an eil tu hag egile. Da gentañ e voe dibunet gant ar re a oa a-enep, SOS-Patrimoine er penn-raok, met, pa c'hounezas ar re-mañ war dachenn al lezannoù e voe tro d'ar re a oa a-du gant ar porzh da huchal, ar PSF en derou ar brosasion : Per-Ewan d-Tremael, an depute, Per Jagoret, an depute kozh, Gouriou, maer Lannuon, Perrin, maer Pleuveur, hag all...

Petra o devoa ar re-mañ da vezañ deuet ken niverus ? Da gentañ, diskouez e cant a-du a-grenn gant ar porzh. Ya met perak pouezañ kemend-

all ? Doareoù respontoù a vez roet e-leizh kostez Trebeurden, met alies hep prosienn ebet. D'an eil ez eus mignoniezh etre ar P.S.F. ha Gwenneg, ar maer, rak hemañ en devoa cheñchet tu d'e borpant un nebeud bloavezhioù zo pa oa deuet diouz ar P.C.F. d'ar P.S.F. Tremael, eñ, emañ e vreur o terc'hel unan eus brudetañ restaorantoù Trebeurden ... 50 metrad eus ar porzh nevez.


Gwenneg er bidouf

An Aotrou Minguy, mestr ar stal a save studiuñ ekonomikel diwar-bann ar porzh, a voe toulbac'het e Roazhon e penn-kentañ an diskar-amzer. Hemañ en defe anzavet bezañ roet arc'hant da Wenneg. Nevez deuet eo e-maez eus ar bidouf hogen, Gwenneg, eñ, a zo kraouiet abaoe an 21 a viz Du ha tamallet dezhañ bezañ “miret madoù boutin” ha bezañ “fals-sinet aktioù a genwerzh”. Hemañ a respont n'an devoa graet nemet amprestiñ arc'hant digant Minguy...

An Arc'hant o tegas disunvaniezh mesk an dud

Ar pezh a zo tristidigezh en abadenmañ eo penaos e c'heller touellañ an dud da vezañ evit ur vilbezh a borzh, a zispenn kaerder un aod, en ur lakaat an dud da gredif e vo krouet postoù-labour e-leizh ha pinvidikaat an holl. Ing'al ar pezh a vo graet gant ma vo rastellet ur gwenneg bennak ! Gwenneg ha gwenneg ez a yalc'hig da yalc'h !

Ha koulskoude pa vez sellet pizh ouzh an darvoudoù, e weler penaos n'eo bet gwech ebet labourioù ar porzh hervez al lezenn.



Ar gwel o devo “Estivantien an EDF” diwar bondaleoù o lojeiz-hañv.

Ret eo kompren ivez ne oa ar porzh nemet un digarez da voulc'hañ betonadur Traezh-Meur, aod Trebeurden. Sklaer oa ar raktesoù war an-tu-se.

Mezhus e oa klavout kamaladed Tremael o kunjanniñ difannourien an endro, darn o lavarout ne cant nemet estrenien d'ar vro pa c'houvazer piv zo drek ar porzh : Campenon-Bernard, ur rann eus SAE Borie renet gant an aotrou Ben Tata, un dan pinvidik deuet d'ar Frañs eus broioù ar petrol, hervez klevet.

Ur bern traoù all a zo da lavarout c'hoazh. Komzomp un tamm eus tud ar vro. Da gentañ, ne c'hellio mui tud Trebeurden lakaat o bagoù ar porzh gant ar c'her e kouste stagañ e vag ennañ : priz un ti en ur ober tregont vloaz a berc'henniezh war un organell ! Ne c'hellio mui ar Breizhad lakaat e vag

e gwasked ar pleg-mor-mañ ha lec'h all ne vez ket kenkoulz gouderet. D'an eil, eo spontus gwelout betek pelac'h eo aet an disemglev, betek donder ar familhoù a zo bremañ disrannet, kement a arguz evel ma'zous bet. Rannet ar boblañs dre n'hanter : an tu kleiz hag ar gofvarsanted ouzh un tu, an tu dehou hag an ekolojisted ouzh an tu all. Trist ar vuhez er barrouz-mañ bremañ hag evit pell amzer. Da Nedeleg e nac'has an ti-kêr lakaat hag enaouiñ gouleiañ evel ma'z eus bet graet en holl barroùzioù all tro-war-dro. “Ma c'helljen-me kanañ laouen”, a lavare Strollad ar Vro-Bagan un toullad bloavezhioù zo, nemet en dro-mañ n'eo ket ur pezh-c'hoari eo, met ar vuhez an hini eo.

Gireg Konan

(\*) Tro-lavar a Vro-Dreger



P.-Y. Tremael ha Per Jagoret o tivizout gant Per Roparzh, eil-vaer Trebeurden.

GALV

Kemennadenn a-barzh ul lenner d'an hini en doa skrivet ar pennad : “ar vrec'hidigezh Friedmann” e 1990 e-barzh Bremañ : Skrivet ho poa ur pennad e-barzh Bremañ a-zivout ar vaksin Friedmann. Taget on evldoch gant ar bern-alan. Ho padin a ran da skrivañ din evit lavar din piv a ra gant ar vaksin-se e Breizh :

Leon Michel 3,rue de Locudy 29200 Brest. Trugarez en arak

# Ouzhpenn 6 milion a vugale dilezet e Brazil

## Manifestadeg "Bugale ar Straedoù"

442 vugel drouklazhet e 1989 e Rio (13 % a oa merc'hedigoù), 492 e 1990, 23 % a vevched en o zouez, daougemantet eo ar sifroù e 1991. E miz Here ez eo ur plac'hig 13 vloaz, dougerez, a zo bet kavet er straed, lazhet 'oa bet gant Bagadoù ar Marv. 40 muntr a oa bet e-kerz an dibenn-sizhun se...

Ar re goshañ a oa 14 vloaz, ar re yaouankañ 3 bloaz... Etre 6 ha 12 milion int o vevañ er straedoù, dilezet, heptad na mamm, na familh, o krakvevañ gant labourioù bihan ha dister. Hag evel just e vo ivez an dram, al laeronsi, ar werzh-korf. Hag aliesoc'h aliesañ ar marv e penn an hent. Ur marv rakjedet gant bagadoù muntrerien a-vicher, liammet gant ar bolis, ha gopret gant kenwerzhourien kêr zoken, a-benn "naetaat" ar straedoù.

### Gwashoc'h evit chatal

6000 e oant o tibunañ e kreiz-kêr Rio evit enebañ ouzh al lazhadegoù stroll a zo bet ingalet ha rakjedet en un doare teknikel. Skoazellet e oant en o manifestadeg gant strolladoù Gwirioù Mab Den, UNICEF, an Iliz, ha tud eus kuzul-kêr Rio. Ur bed all, tost ouzhimp. Un tamm eus gwirvoud ur vro a glevet komz diwar he fenn evit en em c'houlenn peira a vano eus he c'hoadeg veur a-benn 10 vloaz. Kompren al liammoù kemplezh a zo etre holl guedennoù Brazil a vo ret evit dont a-benn d'o dirouestlañ.

LL.



Miliadoù ha miliadoù a vugale 'zo bet o tibunañ e kreiz-kêr Rio de Janeiro er miz tremenet evit diskouez o anken dirak ar muntrou graet a - e n e p "Bugale ar Straedoù" g a n t Bagadoù ar Marv.

## Berr ha Berr

### Indianed Kebek :

N'eo ket dirouestlet kudenn Indianed Mohawk en OKA, abaoe an Hañv 90. Gwir eo eo bet prenet an douaroù a oa pennabeg ar stourm gant gouarnamant Kanada ha n'eus ket bet graet lachennoù golf anezho evel ma venne ober kuzul-kêr OKA e Kebek. N'int ket bet adroet d'ar gevredigezh Mohawk avat. Gant ur bras niver a bouez emañ o paouez bezañ adilennet maer OKA hag en doa galvet polis Kebek d'ar 26 a viz Gouhere 90. Embannet en deus e vo studiet raktreoù nevez a annezadur er memes kom.N'eo ket se a lakao ar stourmoù a vez ingal c'hoazh etre ar vrezelourien votawek hag Archerien Rouselezh Kanada da baouez.

### RMI evit Indianed Stad-C'hall :

Meur a boblad indian o vevañ e Gwiana c'hall zo en arvar. Root eo bet an RMI da lod eus an henvroidi pezh a zo enep-lezenn dre ma tistab ar c'hevredigezhioù-hont. Setu bremañ ivez daou raktres nevez ouzh o tagañ : ur raktres a redadegoù bagouigoù dre-geflusker hag ur raktres a imbours'h aour e SAUT-TAMPOC kaset gant ar prefed. Goul a ra ar gelaouenn NITASSINAN ouzh an dud kas lizhiri-enebiñ da Brezidant ar Republik, d'ar Ministr-Kentañ, da Vinistr an amveva.

Y.V.T.

### Kelennet e vo turkeg e Bulgaria

Adalek ar miz-mañ (C'hwevrer 1992) e chelio ar skolioù kentañ derez Bulgaria. Abaoe 6 vloaz ne oa ket aotret ken. Abaoe penn kentañ ar bloavezh-skol-mañ e oa bolkoret ar skol gant familhoù ar gumunizh turkek, 900 000 a dud er vro. Aotret eo bet kelenn an turkeg e miz Du gant ar gouarnamant nevez (enep-komunour), a zo harpet gant an "Emsav evit ar Gwirioù hag ar Frankiz". Ar gouarnamant kozh, roet gant ar strollad skolaour, en doa nac'het ar gwir-se adarre e miz Gwengolo.

M.K.

Ar skoliata kenstur e Bangladesh

## EFEDUSTED SKOL-AL-LOUARN

Mont a-enep an dilizherennegezh eo pal ar C'homite evit Diorren Maezioù Bangladesh (BRAC), ur c'hevredad distag diouzh ar Stad, abaoe 1979. Evit-se e heuilh hentoù eeun ha dibar war un dro.



"Ur c'hlas" e Visva Bharati University e Beñgal

**S**trizh an enkadenn m'emañ Deskadurezh Bangladesh. Enskrivet eo 70% eus ar vugale. 35% anezho a da betek ar c'hlas 5 avat. Ar re all a guit ar skol. Div drederenn eus ar boblañs ne ouzont ket lenn na skrivañ. Diwar ar 110 milion a dud. An hanter anezho bugale. Klasoù-se zo bet graet gant BRAC : deskiñ lenn ha skrivañ d'ar boblañs. Ha pa ne zeu ket a-benn ar Stad gant an holl skoaelloù a estrenvro emañ BRAC o tiskouez penn an hent mat : reiñ a ra d'ar vugale un deskadurezh-diazezh kreñv. 90% eus o deskerien zo gouest da vont da heuliañ ar C'hentañ Derezh.

Krouet e voe BRAC e 1972 goude ar brezel-emzieubiñ evit skoaell tud ar maezeier. Buan awalc'h e voe merzet pebezh skollh a oa an dilizherennegezh. Setu ma voe divizet sevel ur skol a glote ouzh ezhommoù ar vugale. Goulennet e voe ouzh tud ar vro o alioù evit chom hep ober hevellep faziou hag an Deskadurezh Stad : re bell e veze ar skolioù, re ger an dañf evit pep bugel, re ger an dilhad-skoliad, re bell an danvez-kelenn eus buhez ar maezioù ha dalc'het ar vugale gant ar skol pa veze ezhomm anezho er parketer pe er gêr.

### Foukennoù soul

Ur skol-arnod a voe digoret e 1979 gant BRAC neuze. 23 skol a dregont skoliad pep hini a oa e 1985. Skolidi etre 8 ha 10 vloaz anezho. Ur c'helec'hivad evit ar grennarded

(betek o 16 vloaz) a voe digoret e 1988. 4500 kraizenn a oa e 1991, 127 000 a skolidi. Kant mil kreizenn a-benn 1997 eo ar pal. Ha ne vasto nemet ul lodenn vihan eus an ezhomm.

Pa vez postet arc'hant ar stad e savadurioù bras ha kaset e vez foukennoù soul pe vambouz e kreizennoù BRAC. Ur sal-glas hepken 'ta e-lec'h ma vez azezet ar vugale war al leur ; ur voest a dalvez da daol ha da sach-skol.

Azezet e vez ivez ar skolaerezh war al leuzi dindan an daolenn-zu. 82% eus ar skolaerien zo merched evit dedennañ ar merc'hed d'ar skol.

### Ur stummadur a bemzketez

C'hwec'h devezh diwar seizh e vez skol : 270 devezh e-pad ar bloaz. Teir survezh e pad an devezh-skol avat ! Diwar ar vubhez-pendrez e vez diazezet ar c'hentelioù. Ul lodenn vras as a d'ar sevenadur : tri c'hardeurezh a gan, a zañs, a c'hoar...

Evit ar skolaerien e vez klaslet war-lec'h tud hag a zo bet er skol e-pad nav bloavezh evit stummañ anezho e-pad pennezketez. Da c'houde e vez un devezh-stummañ bep miz. 350 taka (tro 50 eur gall) bep miz eo ar gopret evit ar bloavezh kentañ. Ur spi nevez a zwan er c'heizennoù-hont. Lod eus ar vugale, evel Shamara, a venn dont da vezañ skolaerien pe ober o mad eus o deskadurezh nevez evit kavout ur vicher.

Y.V.Thorl

Daouzek Breton e bro an Aur Du

## Dañs ha son

**Daouzek ezel** eus Kelc'h Keltiek Bro Pariz "Labour ha Kan" a oa bet pedet da seniñ ha dafsal en Abu Dhabi, kêrbenn U.A.E. (e saozneg United Arab Emirates). Abu Dhabi a dalv "ad ar gazeled".


Seizh emirelezh a zo er stad. Ur milion a dud a vev eno. Ur vro binvidik eo gant an eoul-maen. Ur gêr savet e dek vloaz eo Abu Dhabi. Savet eo bet evel kêr New-York, skraberioù-oabl, straedoù hir hag eeun, skoazh ouzh skoazh...

Ur gêr savet re vuan rak ret eo bremañ adsevel (gant milionoù a z/dirham, monreiz ar vro) met petra dalv milionoù evit ur vro ken pinvidik !

Diwall ! Teurel ur sigaretenn war an douar zo 500 dirham (ingal da 800 eur gall), lazhañ ur c'hañval zo 75000 dirham (12 milion a lurioù gall) ; ma vijech tapet gant ar polis.

An dud a labour a zo Pakistaniz dre vras. "Emirati ne labouront ket, ne zontit ket !", a lavare doomp "Public Relation" an ostaleri. Daou vil Europad a labour er vras. Bretoned en o zouez. Lacuen e oant da gavout kenvidki ken pell eus hor bro (6000 km). N'eus tourist ebet er vro. Dilennet e vez ar vizaou. Evit dont er vro, eo ret labourat pe vezañ pedet. Evidomp e voe ur veaj burzhudus, ha lezel a ralo evit-gerennoù da gontañ d'hon bugale vihan.

Paskal le Tessier



TI AR BREZHONEG

"Expolangues" 12-16 a viz C'hwevrer

Evel bep bloaz e vo dalc'het e miz c'hwevrer ur stand war ar brezhoneg e "Expolangues-Pariz" gant Ti Ar Brezhoneg. Kelennerien war ar brezhoneg an deskadurezh publik (KBDP), Emlêv Sevenadurel, Radio-Bro, Diwan Pariz. C'hoant ho peus e vefe diskouezet war ar stand-se ho labour evit kas war-raok ar brezhoneg ? Neuze, kasit ho tanvez-brudañ a bep seurt (traktou, foliennoù-kinning, skritelloù, kelaouennoù...) da : Marc GUILLOU, 6 rue de la Mare, 75020 Paris




**GW.** Ha gallout a rafes lavaret din pehini eo bet istor ar vezafs asturat e gouelioù Etrekeltiek an Oriant ?

**L.L.** Ma, ar c'hentañ darempredoù etre Bro Astur hag ar gouelioù a voe skoulmet ganin e 1977. Deut e oan d'an Oriant da vare Pask, da gefver Kan ar Bobl. Komzet em boa gant an dud a rae war-dro ar Gouelioù. Daou vloavezh goude e teus an dro d'an Oriant hag e kinnigis un teuliad. Ne voe ket respontet diouzhtu ha dilezet e voe hor goulnenn zoken abalamour d'ar c'hudennoù arc'hant a oa bet gant aozadur ar Gouelioù d'ar mare-se. Met pa amezelis e Poellgor ar Gouelioù Uriñ/Oviedo, e pedis strolladoù breizhat da zont da vro Astur. E 1984 e oamp bet pedet da vont da Gilarne en Iwerzhon ma oamp en em gavel gant Bretoned ha tud eus broioù keltiek all. Ar memes bloaz hor boe tro da gejañ gant tud eus gouelioù Kerne, Paolig Montjarret hag all. Nebeut war-lerc'h e voe aozet en Uviñu un abadenn tienn geltiek hag adal 1985 e oamp bet degemeret en Oriant evel "bro pedet". Hemañ eo bet hor savlec'h e-pad tri bloavezh. A-benn ar fin e voe degemeret Bro Astur da eizhvet ezel eus Poellgor ar Gouelioù Etrekeltiek e 1988. Abaoe emamp en Oriant a live gant ar re all.

**GW.** Komzet e vez eus gouelioù etrekeltiek hag eus broadoù keltiek zoken, ar pezh a dalv ez eus ur vroad eus Bro Astur da gentañ hag unan geltiek d'an eil.

**GW.** Komzet e vez eus gouelioù etrekeltiek hag eus broadoù keltiek zoken, ar pezh a dalv ez eus ur vroad eus Bro Astur da gentañ hag unan geltiek d'an eil.

**GW.** Anavezet eo dre un nebeut roudoù, anvioù-lec'h...



**Pennad-kaoz gant Lisardo Lombardía, dileuriad asturat e Gouelioù Etrekeltiek an Oriant.**

## BRO ASTUR ha BREIZH

**L.L.** Anvioù-lec'h ha traoù all rak er yezh asturek e c'heller kavout kalz gerioù a orin keltiek. Ma soñjer eo keltiek ur vro ma komzar ur yezh keltiek, ne vefe ket Bro Skos Keltiek en he fezh zoken. Met estregat ar yezh a zo : ur bed sevenadurel, daveoù sevenadur a zo anezho e Kalaikia ha Bro Astur, an div vro eus al Ledenez Iberek e embann o c'heltiegezh.

**GW.** Petra a respontez d'ar yezhonour brudet Menéndez Pidal pa gomz eus "ar rannyezh asturek-leonek" ?

**L.L.** Menéndez Pidal a gomz eus ar rannyezh asturek-leonek evel ma komz eus ar rannyezh Kataliek-portugalek. Diouz ur savboent yezhoniel ne dalv mann ar ger rannyezh. Ur rannyezh eus ur yezh Keltiek orin eo ar brezhoneg moarvat evel m'eo an astureg ur rannyezh eus al latin.

**GW.** Ya, met lavaret a reer ez eus re a zisheñvelerioù etre ar rannyezhoù (pa eilstummoù) asturianeke evel ma c'hellfed komz eus ur yezh urvan. Pezh a gomzer er c'hornôg a vije tost-tre ouzh ar c'halaikianeg tra ma vije astureg ar reter ur stumm eus Kastilhaneg Kantabria.

**L.L.** Pa saver ur yezhkartenn e vezer broudet allies gant ratozhioù n'o deus netra da welet gant ar yezhoniezh. An dachenn gornôgell a zo ur dachenn-dremen etre Kalaikianeg hag astureg hag er reter ne gomzer ket un eil stumm Kastilhaneg. Ar c'hontrol eo. Pezh a vez komzet e Kantabria eo astureg ar reter. A-hand-all e kaver ar binioù (gaita) e Kantabria el lec'hioù ma komzer an eilstumm asturek-se.

**L.L.** Ma, er Stad Spagned ez anavez, ez ofisiel, teir broadelezh a vez graet istorel anezho, Kalaikia, Euskadi ha Katalonia. Kalaikia n'eus bet biskoazh ur rouantelezh anezhi, Euskadi kennebeut ha Katalonia a voe ur gountelegezh gant un tamm mat a emnerezh mat abaoe pell zo n'eo ket dizalc'h ken. Neuze ne dalv ket kalz a dra ar mennozh-se. En eskem, pezh a zo pouezus kenañ eo ar yezh. Bro Astur he deus ur yezh termetenn splann n'eo ket bet skrivet kalz e-pad kantvedoù, a zo gwir, met anavezout a ra ur gwir dioradur abaoe trogent vloaz zo. Bez' ez eus ul lusk, ul lañs abouezh war dachenn ar yezh hag ar Sevenadur hag a zo degemeret gant an darn vrasañ eus an dud petra bennak e chom enebiezh e-touesk ar graizennourien a wel un dañjer en dioren-se.

**GW.** Eit a sell an daou graf kentañ e oa owei-se ivez en hengastilhaneg.

**L.L.** Evelljust, E Portugal hag e roumaneg ivez ? Moarvat ! E vit gwir, a-walc'h a elfennoù a zo evit ober ur gwir yezh eus an astureg. Pezh a zo bet degemeret gant ar yezhonierien dre vras. Met evit abegoù ideologel nemetken e kendalc'h yezhonierien zo da nac'h ez eus eus ar yezh asturek.

**GW.** War dachenn ar sonerezh bremañ, ha soñjal a ra dit e c'heller komz eus ur sonerezh Keltiek, da gentañ, ha d'an eil, daoust ha levezonioù Keltiek a gaver e sonerezh

**Bro Astur ?**

**L.L.** Ne gredan ket ez eus eus ur sonerezh Keltiek. N'on ket muzikologour a live uhel, songarour ne lavaran ket. Ha labourat a ran war dachenn ar sonerezh abaoe bloavezhioù hag ez embannan pladennoù. Pezh a zo neuze eo sonerezh graet er broioù keltiek ; Sonerezhioù disheñvel an eil re diouz ar re all. Er broioù keltiek e tañser Jigou ha dañs polka eus ar XVIIvet pe XVIIIvet kantved.

**GW.** Ya, met dansoù kozh, e kelc'h a gaver ivez e Bro Astur, evel e Breizh.

**L.L.** A zo gwir. An dansoù koshañ a gaver er bed keltiek, hag a zo ouzhpenn-se heñvel awalc'h an eil re ouzh ar re all, eo dansoù Breizh ha re Bro Astur. Ar c'hant-dezrevell, gant naered, an heol, al loar, a gaver e Bro Astur a c'heller keñveriañ gant pezhioù eus Barzh Breizh.

**GW.** Penaos e isplegezh neuze e c'hell ar c'hannad eus ar PAS (Partido Asturianista) Xuan Xosé Sánchez Vicente chom hag komz eus Keltiezh eus er levr war ar sevenadur poblek asturat. Evitañ, war a hañval, e lle Asturiz pep tra d'ar Romaned.

**L.L.** Dek vloaz zo pe se eo bet skrivet al levr-se ha, da'm menno, ne sifne ket eñ e-unan al levr-se hiziv. Sánchez Vicente a zo ur skrivagner meur, e-keñver lennegel, en doa klasket difenn unanet ar sevenadur asturat, betek re, un tammig a-ziwar c'horre. Abegoù zo bet kavet d'e levr e Bro Astur. Pa oa bet skrivet al levr-se na oa ket bet dizoloet c'hoazh Kêr Noega e-kichen Xixon - daoust ma soñjer e lle bezañ tu bennak dre aze - hag a bauririekha hon zezennoù. Dre studiañ pizh drein ar pesked bet kavet eno e ouzer bremañ e oa gouest Asturiz da vont da beskata betek Mor an Hanternoz, betek Iwerzhon, da oadvezh an Houarn. Bez' e kaver roudoù eus ar sevenadur hallstatal er rizenn gantabrek en he fezh. E-barzh Oppidium Noega ez eus bet kavet kalz traoù eus Mare Hallstatal.

**GW.** Haryez levrioù zo e vefe keltiek "Castros" (Krañlec'hioù) Kalaikia ha kornôg Bro Astur, met n'ouzer ket re vat evit ar re all.

**L.L.** E-touez "castros" Kalaikia ha kornôg Bro Astur, lod zo eus oadvezh an aram ; lod all eus mare ar Romaned, lod all c'hoazh eus oadvezh an houarn. Betekhen ne oa ket bet furchet kalz estreget e Coaña. Krog eur d'hen ober bremañ ha pezh a gaver a gadama hon zezennoù.

**GW.** Da'z menno daoust ha bonreizh ar Stad, hini 1978, a zo a-walc'h da ziorren sevenadur ha yezh Bro Astur pe neuze e vije ezhomm un dezvad nevez a role muioc'h a emnerezh d'ar vro ?

**L.L.** War ar paper n'eo ket kabius ar vonreizh. Ar re gablus eo ar bolitikourien o deus he lakaet da dalvoue an hor bro. Digor a-walc'h eo ar vonreizh evit ma c'hellfe degemer ar stad Kevevadep pe un digreizennadur malestradurel nemetken. Ar youl bolitikel an hini eo a dermen war be du mont. Evit Bro Astur, n'hon eus bet betekhen nemet politikourien na oant ket broadeourien, anat dit, met izili eus strolladoù spagnat. Un dachenn aea da c'honit e oa Bro Astur evit an tu kleiz. Ne felle ket dezho reiñ da vro Astur ar memes dezvad hag a zo e Katalonia pe Euskadi.

**GW.** Un nebeud bloavezhioù zo e sellec'h c'hwil Asturiz, ouzh Breizh evel ur skouer da heñvalañ, kouz lavaret. Ne gav ket dit e vefe hon vro da vont d'ho kwelet bremañ, da dennañ gonid eus ar pezh a rit du-se ?

**L.L.** Ya, gwir eo ? Ur roll a bouez he deus bet Breizh e dihun sevenadurel Bro Astur. Alan Stivell, ar strollad Gwendal o deus levezonet hon sonerien. Gouelioù an Oriant a zo bet hag a zo c'hoazh un darvoud pouezus-tre evidomp.

**GW.** Met pezh a lavarez a zo gwir : tra m'emañ an traoù o vont bapred war-raok e Bro Astur, e verzhier un tamm dicalh amañ e Breizh. N'eus ket kement a startijenn gant an Emsav hiziv ha ma oa pa oan deut evit ar wech kentañ ; da'm menno, bapred.

**GW.** Trugarez dit Lisardo.



Kreizennoù sevenadurel e Breizh

Bleuniañ a ra un tamm pep lec'h e Breizh kevredigezhioù, o fal bodañ tud evit komz, divizout, sevel traoù asamblez, kanañ, dañsal, dizoleiñ ar vro...

Kreizenn Sevenadurel Sant-Malo



Setu me'eo bet ganet e dibenn 1991

TANTAD

"Savet eo bet ar gevredigezh Tantad e-pad diskar amzer 1991, gant un nebeud tud o deus c'hoant d'ober un dra bennak asambles evit reiñ startijenn d'hor c'horn bro hag evit reiñ lañs d'an traoù a sell eus Breizh tost pe dost."

Da gentañ, e vo Tantad ul lec'h evit en em gavout asambles, pakañ banneoù, festiñ, komz ha marvailhat.

Pal Tantad a zo ivez sevenadurel, hep mont war an ton bras : sonerezh, sketchoù, c'hoariva, kaezeadennoù a bap seurt war an traoù a-bouezh ha tost d'an dud...

Prestat eo bet un ti gant Park an Anvrig, just e-kreiz ar vro etre Kerne, Leon ha Treger.

Digor e vo d'ar Gwener etre 20e hag hanternoz ha d'ar Sul etre 3 eur hag 8 eur goude lain.

Setu amañ chomlec'h an ti : Tantad - Plasenn ar Releg - Plouneour-Menez 29223

An trimiziad-mañ : "buhez loened ha plantennoù ar Menez Arre" gant ur bevonour.

- diviz, gouel diwar-benn Bro Iwerzhon  
- fest deiz  
- pred

- marteze e vo aozet ur veaj.  
Gwellañ hetoù a-berzh Dor Zigor, Kanevedenn, Ti ar Brezhoneg, Egin, Unvaniezh Bro Roazhon, Emglev Bro an Oriant, Kelc'h sevenadurel St Malo, C'haed Abherve, Kreizenn Roparz Hemon, ha.../ha.../ha... Ma anavezit seurt kevredigezh e-kichen ho ti pe en ho parrez, kasit kelou deomp !

Ur sal nevez he deus ar gevredigezh abaoe miz Mae, 17 straad ar Porzh, hag ur prezidant nevez, Joel Martini, dilennet e bodadeg veur miz here, anezhañ ur brezhoneger gredus. Lidet he deus ar Greizenn Sevenadurel hec'h 20vet deiz-ha-bloaz en ur aozañ ur rummad oberiantizoù goude ehan-labour an hañv.

Da gentañ prezegennoù :  
- Doming Deffains : orin ha kelennadur ar galleg  
- Loeiz ar Beg : Istor an Emsav  
- Annaig Renault : Ar skrivagnerezh brezhoneg  
- Fransez Favereau : Al lennegezh vrezhonek  
Da c'houde :

- ur bourmenadenn e koad Brekillen, gant displegadennoù Marsel Kalvez  
- un devezh ar c'hristin, o reiñ plas d'ar sonerezh, d'ar gonterien ha d'ar gouren  
- ur Fest-Notz, gant kevredigezhioù sevenadurel all

- aozidigezh ur stand gant levrioù brezhonek pe diwar-benn Breizh, hag un diskouezadeg war ar gouren da gefiver devezh ar c'hevredigezhioù e Sant-Malo

- kinnigadur pezh-c'hoari Strollad ar Vro Bagan, "Kenavo my love", a-gevret gant Ti ar Varzhed hag ar Skrivagnerien

- ur vodadeg vrezhonegerien gant bannadur film Mikael Treger, "Al laer avel".

Hogen e-doug an hañv he doa dija kenlabouret ar Greizenn gant Ti ar Varzhed evit ar prezegennoù-mañ :

- Yann-Glaod Lozac'hmeur : Dafydd ar Gwilym  
- Herri Gourmelen : Ar c'hontadennoù hag ar c'hanaouennoù pobl e Europa an 19vet kantved (kan gant Annaig Renault)

- Per Denez hag Andrea ar Gouilh : Barzhaz Breizh  
- Jakez Gaucher : Istor ar broioù keltiek  
- Stephen Amos ha Per ar Bihan : Bro-Gernev ha Kernevez en Aostralia.

A-hed ar bloaz e vez oberiant ar Greizenn gant :  
- bodadegoù bep teir sizhun en-dro d'ar galleg  
- kentelioù abardaez : koroll, d'ar Merc'her, 8e30 ha gouren, d'ar Sadorn, 6eur.

**Kentelioù brezhoneg**  
skol gentañ, d'ar yaou, 6e30 (Jakez-Erwan Mouton)  
eil derez, d'ar meurzh, 6e30 (Jilberzh Monroy)

trede derez, d'ar merc'her 5e15 (Yann-Glaod Morvan)  
E-keñver ar yezh, e vez graet bodadegoù brezhonegerien, oferennoù a zo bet lidet e brezhoneg er bloavezhioù diwezhañ, kemeret ez eus bet perzh er stourmoù en ur vont d'ar manifestadegoù, en ur skoazellañ Diwan, en ur ober goulennoù evit ul lezenn ar yezhoù minorelezhel... Yann-Glaod Morvan kelenner war ar brezhoneg e lise Jakez Kartier, en deus kroget dre e intrudu hag e youl da reiñ kentelioù ivez e div skol kentañ derez.

P.A.B.

Emvod an tiegezhioù  
Dalch'et eo bet bodadeg an tiegezhioù e Rostren d'ar Sul 22 a viz Kerzu. Marteze e oa bet dibabet fallik an deiziad, e kreiz ar goañv, re dost ouzh Nedeleg. Un ugent bennak a dud a oa deuet memestra gant un dek bugel bennak. Goude ar pred e vo aozet c'hoarioù : evit an dud vras ur gloued gerioù kroaz, re denn eme ar berzhidi ; hag evit ar vugale folloennoù bras da livañ warno. Implijet e voent da c'houde e-keez ar ofereñn a voe lidet e chapel Kampostal ; meur a veleg a oa o kenofereñniñ. Un dregont bennak a dud e oamp. Ur vodadeg all a vo e miz Ebrel.

**Breurezh Sant Iltud**  
E dibenn miz Kerzu eo bet prenet war anv Breurezh Sant Iltud un domani bras a-walc'h (meur a di, unan prest-hout evit lojañ, gant kalzig douar tro-dre) e kreiz bourc'h Kistinid (Bro-Wened). Servijñ a raio da annez d'ar baotred yaouank o deus divizat ten ur vuhez relijiel kristen e brezhoneg, krouiñ eno ur greizenn sporel ha sevenadurel, ha degemer tud all, laiked, beleien, a dremennoù d'ober retredoù, a chomo da badiñ ganto, ha zoken da vevañ mar fell dezho. Evel-just ez eus kalz a labour d'ober evit kempenn pep tra, met tamm-ha-tamm, gant sikour ar vignonned, e vo graet. Tu a vo ivez, ma teu ar c'halvidigezh dimp, (piv oar ?) da adkempenn an ti-krampouezh stag ouzh an domani ha da warzhañ krampouezh d'an douristed ha da dud ar vro evit dastum un tamm gwenneien. Un arouez a esperañs e dazont ar feiz kristen hag an Iliz e Breizh an hini eo. Dimp-ni holl d'an em unaniñ evit ma yelo an traoù da vat mar bez bolontez Doue.

Yann Talbot

KELEIER  
KENVREURIEZH SANT ERWAN

Marv Eskob Sant Brieg ha Landreger : Per Kervennic

Aet eo trumm da anaon Ao'n eskob Sant Brieg ha Landreger d'ar sadorn 21 a viz Kerzu 91 an e di eskobal e Sant Brieg. Klafividik e oa abaoe meur a vloavezh, kudennoù gant e galon hag e wazhed. Met ne oamp ket en gortoz eus ur marv ken soudan evelato. Gwir eo, ne gemere ket kalz a amzer da ziskuilzhañ kennebeut.

Emvod an tiegezhioù

Dalch'et eo bet bodadeg an tiegezhioù e Rostren d'ar Sul 22 a viz Kerzu. Marteze e oa bet dibabet fallik an deiziad, e kreiz ar goañv, re dost ouzh Nedeleg. Un ugent bennak a dud a oa deuet memestra gant un dek bugel bennak. Goude ar pred e vo aozet c'hoarioù : evit an dud vras ur gloued gerioù kroaz, re denn eme ar berzhidi ; hag evit ar vugale folloennoù bras da livañ warno. Implijet e voent da c'houde e-keez ar ofereñn a voe lidet e chapel Kampostal ; meur a veleg a oa o kenofereñniñ. Un dregont bennak a dud e oamp. Ur vodadeg all a vo e miz Ebrel.

Breurezh Sant Iltud

E dibenn miz Kerzu eo bet prenet war anv Breurezh Sant Iltud un domani bras a-walc'h (meur a di, unan prest-hout evit lojañ, gant kalzig douar tro-dre) e kreiz bourc'h Kistinid (Bro-Wened). Servijñ a raio da annez d'ar baotred yaouank o deus divizat ten ur vuhez relijiel kristen e brezhoneg, krouiñ eno ur greizenn sporel ha sevenadurel, ha degemer tud all, laiked, beleien, a dremennoù d'ober retredoù, a chomo da badiñ ganto, ha zoken da vevañ mar fell dezho. Evel-just ez eus kalz a labour d'ober evit kempenn pep tra, met tamm-ha-tamm, gant sikour ar vignonned, e vo graet. Tu a vo ivez, ma teu ar c'halvidigezh dimp, (piv oar ?) da adkempenn an ti-krampouezh stag ouzh an domani ha da warzhañ krampouezh d'an douristed ha da dud ar vro evit dastum un tamm gwenneien. Un arouez a esperañs e dazont ar feiz kristen hag an Iliz e Breizh an hini eo. Dimp-ni holl d'an em unaniñ evit ma yelo an traoù da vat mar bez bolontez Doue.

Oferenn e koun Amans ar C'halvez, e Kemper-Gwezeneg.

Un ofereñn a vo lidet ganin d'ar Sul 23 a viz C'hwevrer 92 evit ugentvet deiz-ha-bloaz marv hor c'henvreur mat Armañs ar C'halvez, marvet yaouank c'hoazh, diwar ur c'hlañved diremed hag ur gofad relabour d'an oad a 51 bloaz. Ur stourmer dibleg e oa bet, un diazezer, un den youlek ha desket, ur beleger aketus da seveniñ e gefridi. Pedit a ran ar veleien a vo dieub d'an em gavout e Kemper-Gwezeneg d'an 23 a viz C'hwevrer da 11 eur evit kenofereñniñ. War an hevelep tro e vo graet eñvor eus Roger Nedelec, bet person e Kemper-Gwezeneg, hag eus Erwan Ar Sant, ganet er barrez-se, kenderv Armañs, stourmerien o daou, izili ar genvreuriezh Beleien e Breizh, hag aet da anaon n'eus ket pell. Goude merenn e vo tu d'ober ur vodadeg etre mignonned, ha maruze ur brezegenn pe un diskouezadeg bennak. Kaset e vo keloù d'an dud e koulz.

Yann Talbot

Burev Titourif

Kalc'h Sevenadurel Gwened en deus digoret nevez zo ur burev tliouñ diwar-benn sevenadur Breizh. Emaomp o klask bodañ ar muiañ posubl a ditouroù a-zivout hor sevenadur a-vremañ ; ar c'hevredigezhioù, an embannadurioù, ar c'halaoennoù, ar skingomzoù lec'hel, ar stajoù, ar festoù-noz, ha Digemeret e vez an dud zo o klask dachennoù-se, pemp devezh ar sizhun, eus ar Meurzh betek ar Sadorn, da vintin etre 10 eur ha kreisteiz, d'abardaez etre 2 eur ha 6 eur, 6, straad ar Givijerez, e Gwened. Spi hon eus hon o ar pellgomz hep dale. Goulenn a reomp ganeoc'h kas deomp peadra da sevel teulioù da gelacuiñ an dud dedennet gant hor sevenadur, hor yezh, hol lennegezh, hon istor, an natur en hor Bro, h.a. hag ivez da vouetañ hor stal-diskouez. Ho frugaerkaat a reomp en a-raok, a greiz kalon.

Kalc'h Sevenadurel Gwened  
"An Douarenn" 21, straad an Tier-barn  
56000 GWENED

Kinnig-Labour

Bez' emañ Embannadurioù an Here o klask tud a vo gopret hanter amzer pe amzer leun da aozañ pennadoù evit sevel ar Geriadur Brezhoneg. Evit gouzout hiroc'h, pellgomz pe skrivañ da Embannadurioù An Here, straad Gay-Lussac, Kergleuz, 29480 Ar Releg-Kerhuon, pg. 98.28.10.37.

Stajoù

Pemp sizhünvazh brezhoneg a vo kinniget deoc'h gant Stumdi ach'ann d'an hañv.

24/02 - 28/02/92 ar Releg Kerch'horr (29) Brest  
21/04 - 24/04/92 (Dpt 29)  
11/05 - 15/05/92 an Oriant (56)  
01/06 - 05/06/92 e Eusa  
27/07 - 31/07/92 an Oriant (56)

Meur a live a vo e pep staj. Bez e c'hellit kemer perzh enno war gont ar stummadur dibaoez (a-raok goullenn aotre an embregerezh pellgomzit da Stumdi).

Evit gouzout hiroc'h pe evit lakaat hoc'h anv :

STUMDI - Masmarchou  
B.P. 41 - 29870 LANNILIZ -  
Pgz : 98.04.08.31

Bep daou viz lennit

**AL LANV**

59 hent Kerdonloù Vihan  
29000 Kemper

Koumanant bloaz : 100 lur  
Skoazell adalek 130 lur

Kentelioù-noz e Orleans

"Kentelioù Brezhoneg a vez kinniget d'an dud a youl-vat pep merc'her da noz (8e30/10e30) e Orleans e-barzh "Ti ar Rannvroioù" (Maison Des Provinces). Daou live e vez ingal anezhe a-bep eil sizhun. Neuze Bretoned bro-Orleañs n'ho pe digarez ebet kan d'ober gant ar galleg nemetek. Kemerit perzh !"

Lennit

**al liamm**

Skrivañ da AL LIAMM  
18 straad dae Fours à Chaux  
35400 - SANT MALO -

Koumanant bloaz 150 lur  
(studierien, tud dilabour  
100 lur)

# Feulster etre priedoù Hag ar garantez ?

gant Enora Karadec

Tra m'eo chomet tost diembannet ar gudenn-mañ e diavaez an tiegezhioù betek ugent vloaz bennak zo, e vezer kustum hiviziken da lenn pennadoù-skrid er c'hazetennoù pe gwelout abadennoù-skinwel a-zivout ar c'hraf skoemp-mañ. Hag o vezañ m'eo bet boulc'het ar gaoz gant Barbra Kerien e kredan kenderc'hel d'am zro ganti.



Emzalc'h al loened

Peurvuiañ e vez kavet un abeg bennak d'ar feulster ha gwir eo e vez keñveriet gant un emzalc'h difenn pe emwarezin, o respont d'ur gomz flemmus, d'ur goudeuz bennak... Setu dres aze emzalc'h al loened a zeu da vout drouk ha feuls en hevelep degouezhoù, hag ivez p'eo devez naon. Mar n'en deus ket ezhomm d'en em gannañ evit e voued (en hon toleadoù ac'hoel), e vez gwelet alies an den o kilstourm gant feulster ha droukrañs a-dal d'un atahin bennak. Gouzout a reer mat a-hend-arall n'eo stag ar feulster etre ar priedoù nag ouzh ar metoù kevredigezhel nag ouzh an oad. Hogen ma vez degemeret da wir n'eo an dud nemet loened emdroadec'h eget a re arall, hon eus hor gwalc'h gant an displegadurioù skrivet uheloc'h ; neuze emañ dav dimp bout emskiant eus ar gwander-se a chomo e pep unan ac'hanomp, ober war-dro goulioù ar c'hloaziad ha bac'hañ ar re feulsañ memestra.

### Lec'h an dalc'h

Anzav a ra an darn vrasañ eus an dud avat ez int gouest da garout, da veizata, da glask an eurvad, ar pezh a ziskouez un diforc'h etreze hag al loened, neketa ? Bevañ a ra daou zen a-gevret, dimeziñ a reont, peogwir ez eus karantez etreze, peogwir e fell dezhe bevañ ar garantez-se ; panevet ar vennantez-se da garout, e steuzio tamm-ha-tamm karantez enlanaet ar prantad kentañ, patoc'h e vo an tabutoù da tostaat a raio

### an dispart.

Ur reiz spiwel a c'hello lemnañ avizded ha kerreizhdad ar priedoù hag e vo mestroniet aecoc'h o faltazi hag o angerzhioù ; donoc'h e vo o fiziñs hag o fealdad ha krefvoc'h e vo o unanded. Er memes mod, mard eo mennet ar priedoù d'en em garout evit gwir, ez int gouest ivez d'en em bardoniñ p'en deus unan gwanikennet egile. Un nerzh galloudus eo ar garantez wirion evit trec'hin an aheurtreze, an droukrañs hag ar feulster.

### Al louzoù evedusañ

M'hoc'h eus c'hoant diroustañ ur gudenn, arabat deoc'h chom da huanadif warnezhi ; kit kentoc'h da ziskoachañ he gwirzienn. Ar vezezed hag al louzoù a vez implijet re alies evit diskoulmañ heulidoù un dizurzh bredkantaèzel, hogen ar wrizienn gwarriet a gendalc'h d'ober he reiz.

Bez e c'helle eta an darn vrasañ eus an emzalc'hioù feuls bout lamet kuit gant louzoù evedusoc'h ha natureloc'h : ur reiz lemm hag ur youl grefiv da garout. Gwir eo avat o deus ar ysuankitoù (int dreist-holl) aon d'en em ouestañ en dimeziñ, ken sanket eo en o fenn e talv an dimeziñ kement ha koll o frankiz ! Met petra a dalv c'hoazh ar frankiz hiziv an deiz p'emañ mab-den chadenet gant danvezelouriezh lorbis broioù ar c'hornog ?

Angerzhioù : passions  
bredkantaèzel : psycho-affectif  
danvezelouriezh : matrisialisme

## LEVR NEVEZ

### Ar Mabinogion

Embannet gant Gwalarn etre 1925 ha 1939 setu kinniget, evit ar wech kentañ e stumm ul levr, dastumad klak an danevelloù a zo ouzh ober ar Mabinogion, lakaet e brezhoneg gant Fañch Elies-Abeozen, hervez Levr Gwenn Rhydderch, skrivet e dibenn an XIIIvet kantved ha Levr Ruz Hergest savet e diwezh ar XIVvet kantved. Bez'e oa troidigezh ar Mabinogion, e spered Elies, ouzhpenn an ezhomm da adkavout gwiriziennoù keltiek evit adramañ hon lennegezh nevez, an tu nemetañ da adperc'hennañ ul lodenn eus hon herezh diantek. 130 Lur an tamm - ha 160 Lur war baper kaer - Mouladurioù Hor Yezh-Tereza Desbordes - 1, plasenn Charles Peguy - 29260 LESNEVEN -

### Evit ar Brezhoneg

"Evit ar Brezhoneg", niv.240 (Genver/C'hwevrer 1992) a ginnig deoc'h ur pennad-kaoz gant Gi Al Lae, rener ul lambigerezh e Plovalh (Kemelezel), ur pennad diwar-benn Gouel Sant-Padrig en Iwerzhon hag un danevell-bois. Kavet e vez er stalioù levrioù-mañ : Ar Bed Keltiek (Kemper, Brest, An Oriant), Gwalarn (Lannuon), Coop Breizh (Roazhon), Librairie Breizh (Pariz). An niverenn-mañ a vo e gwerzh en Ostaleri Ti-Kastell e bourk Plovalh. "Evit ar Brezhoneg", BP. 41, 29870 LANNILIZ (an niv : 15 lur - 6 niverenn : 75 lur)

### Fest Noz

D'an 21 a viz Meurzh 1992 e vo aozet ur fest-noz e Kawan gant Kuzul Skoazell Skol Diwan Lannuon. Kaset e vo an abadennoù en-dro gant daou strollad :

### Daouarn hag Ar Re Yaouank.

Tri soner (gitar, bombard hag akordeonis) hag ur c'haner emañ, e teu ar strollad Daouarn eus St Visant war an Oud hag eus Roazhon. Brudet int dija e departamant ar Morbihan, ha bezh mat o devez graet bewech int deut betek Bro-Dreger.

Eus St Nikolaz ar Peleñ emañ **Ar Re Yaouank** o tont. O temp (bombardoù, akordeonis ha gitar) o deus bet ar maout e Kan ar Bobl 1990. Unan eus gwellañ strolladoù breizhad a-vremañ eo.

Ouzhpenn an daou strollad-se, e vo klevet Kan ha Diskan hengounel, gant ar **Vreudeur Morvan**, anavezet mat gant an holl abaoe pellik amzar.

## Gwashoc'h evit an armoù brezel

### Ar vioù poazh

DA ZIWALL A ZO !



**K**levet o doa an holl ober anv eus vi ouzhpenn kevren ar vi poazh : tri Amerikan dija a zo bet glozet ! Hag e c'hellomp lavar bremañ, a-ziwar kement-mañ, ha war an ton bras : nann, n'eo ket diarvarus poazhañ ur vi ! Ha dreist-holl poazhañ ur vi en ijinañenn diaoulegik-mañ : ar forn-mikro-gwagennoù.

Singh hag e genlabourerien a gont istor div vaouez o paouez mont da saourin pep a vi bet poazhet war ar plad, er forn-mikro-se. Dav lavaret e oa bet lakaet pep a forn da vont en-dro diouzh ar c'hreñvañ ma c'helled. Diouzhtu pa oa bet tennet ar vioù er-maez ez eas an div vaouez d'ar melenoù lufus a-nerzh gant o c'hontilli hag o fourchetzioù. Neuze 'n hini e tirollas pep a valen vi da flistrañ trumm er-maez, ha da sailhañ war bep a lagad... devadur a-c'horre ar malvennoù, koll epitelomek ar gornsaes (eus 1/3 betek 2/3), gloaz ar gevresae ha digresk lemmad ar gweled (1/10).

Esplagadenn an darvoud : pa vez poazhet ar melen-vi er forn-mikro-gwagennoù e kresk kalz an temperadur-diabarzh hag ar gwask-diabarzh ha pa doull ar goc'henn-ziavaez e vez argaset trumm gant ar re-wask ar melen bav er-maez. Setu.

Bradford hag e genlabourerien a gont un darvoud mantrus a c'hoarvezas pa edo unan o poazhañ meur a vi gant o c'hios en ur forn heñvel. Lakaet en doa ur paotr yaouank seizh vi da boazhañ e-pad pemp munutenn en ur forn-mikro-gwagennoù, hag houmañ bet lakaet war he c'hreñvañ. Tonnañ a reas anezho er-maez. P'edo oc'h azezañ ouzh taol an dour en c'henoù e strinkas ouzh e vi diwar ar 7, a-darz-trumm ... devadur oil d'ere ar daoulagad, ar fri, an tal, ruzoni ha kemozis ar gevresae en daou du ha koll epitelomek ar c'horn-sae (a-bezh en un tu, darnel en tu all).

Dija e c'heller embann d'an holl broioù ma vez gwarzhet fornioù-mikro-gwagennoù enno :

- 1- toullañ a ranker ar melenoù-vi araok foazhañ en ur F.M.G. ;
- 2- arabat poazhañ ar vioù en o c'hios, tra !

Ha d'an dud yaouank marlonk e c'heller embann ivez kement-mañ : arabat poazhañ 7 vi asambles, a-walc'h gant 1 pe 2 ! Rak kement-se nebutoc'h a strakadenn vo pa darzhint.

Ur vi a c'hellje, eta, tarzhañ a-greiz-pep-kreiz, pa vije tommet re brim, endra ma roio sur ul labous bihan pa vo bet goret gorrak gant ar yar ...

Gilbert Karouanton

## TAOLENN

Lizhiri .....	2
Harz-labour .....	3
Braujoù Breizh .....	4
Politikerezh .....	5
Yezh .....	6-7
Sindikad .....	8-9
Teulid ar miz .....	10-11
Bugale Brazil .....	12
Etrevroadel .....	13
Bro Astur ha Breizh .....	14-15
Kreizennoù sevenadurel .....	16
Barr ha Berr .....	17
Sokial .....	18-19
Fest-noz .....	20

Ar vaketenn gant Jean-Michel Roynard, Lena Louarn.

Skoazell gant Nadine Quetier, Kristell Louarn, Olivier Guillemot.

Pennadoù gant Jean-Do Robin, Gwenaél Caradec, Y. Varc'h Thoral, P. a. M., SAB, Hagareg, Mikael Madeg, Ronan Barvak, Per-Vari Karloc'h, Tangi Louarn, Gireg Konan, M.K., Paskal Le Tessier, Gwenaél Emelyanoff, Lena Louarn, Per ar Bihan, Yann Talbot, Enora Karadec, Gilbert Kerouanton.

Luc'hskudeunnoù gant Lena Louarn, K. a. D., J.M. Roynard, O.F., Gireg Konan, Y.V. Thoral, Gw. Emelyanoff.

Tresadennoù gant Malo ar Menn, Wiaz, Gégé.

Renerez BREMAÑ  
Lena Louarn


**K**skrit e-barzh BREMAÑ !  
Kasit ho pennadoù war baper, pe pladennig (PC pe Mac, ingal eo !) a-rask ar 25 a viz C'Hwevrer.

**NA ZISOÑJIT KET  
AL LUC'HSKUDEUNNOU,  
NAG AN TRESADENNOU,  
DIOUERIN A REONT DEOMP**



# FEST-NOZ RAMZ

e **PABU** ('kichen Gwengamp)



E sal nevez (gant planchod) PABU

**Sadorn**

**15**

a viz

**C'Hwevrer**

**1992**

**adalek 9eur**

**Plijadur 'vo !**

AR STROLLADOU  
STROBINELL  
CARRE MANCHOT  
AR RE YAOUANK  
RETRAIT DE PERMIS  
JM VEILLON - Y. RIOU

AR GANERIEN  
ar vreudeur MORVAN  
ANNIE EBREL - MARSEL GUILLOUX  
JANDO ROBIN - KLAOD AN INTANV  
NANDA TROADEG - JAKEZA AL LAY

DUDI - kreizzennoù - dudi evit ar vugale